

ESPACE
LEURENN

GLEN MOR

SAISON CULTURELLE
FÉVRIER - SEPTEMBRE 2015

CARHAIX

KOULZAD SEVENADUREL
C'HWEVRER - GWENGOLO 2015

KARAEZ

SAISON CULTURELLE KOULZAD SEVENADUREL

2

3, 4 & 5 FÉVRIER RENCONTRES BRETAGNE EN SCÈNE(S)

ESPACE GLENMOR

PANORAMA DE LA CRÉATION ARTISTIQUE EN BRETAGNE

MARDI 3 FÉVRIER

11h00 : Samn Ou (Cie. In Ninstan) > Duo chorégraphique
13h30 : Münchhausen (Cie. du Fomanteur) > Théâtre
15h00 : Et la lumière fuit (Cie. Le puits qui parle) > Théâtre
20h30 : J'ai tant aimé ce monde (Théâtre bleu) > Théâtre,
musique, arts visuels

MERCREDI 4 FÉVRIER

10h00 : La cité des 4000 souliers (La Quincaill' Cie.)
> Récréation poétique
13h30 : Miche et Drate : Paroles blanches (Cie. La langue
dans l'O) > Théâtre
16h00 : Ensemble (Cie. Jupou) > Cirque
20h30 : Un tour ailleurs (Siian) > traversée musicale de l'Asie
centrale à l'Amérique
21h45 : Licenciés de chez Renaud > Chanson



JEUDI 5 FÉVRIER

9h30 : Sur la bouche (Cie. Le grand appétit) > Théâtre
10h30 : Un bout de chemin (Soïg Sibérl) > Voyage musical
intime (séance réservée aux scolaires)
14h00 : Queen Kong (Cie. La Bazooka) > Danse

Retrouvez la programmation détaillée de cet événement sur le site :
www.bretagneenscenes.com

Organisation : Fédération Bretagne En Scène(s)

© L. FLORANGE



TU : 5 € / GRATUIT POUR LES ABONNÉS DE L'ESPACE
GLENMOR, LES ÉTABLISSEMENTS SCOLAIRES ET LES
STRUCTURES PARTENAIRES.



© C. RAUSCH

3, 4 & 5 A VIZ C'HWEVRER EMGAVIOÙ GANT BREIZH WAR AL LEURENN(OÙ)

LEURENN GLENMOR

UR SELL WAR
AR C'HROUÏN E BREIZH

MEURZH 3 A VIZ C'HWEVRER

11e00 : Samn Ou (Kompagnunezh In Ninstan) > Daouad korollet
13e30 : Münchhausen (Kompagnunezh Le Fomanteur) > C'hoariva
15e00 : Et la lumière fuit (Kompagnunezh Le puits qui parle) > C'hoariva
20e30 : Karet em eus kement ar bed-mañ (C'hoariva glas) > C'hoariva, sonerezh, arzoù gwelet

MERC'HER 4 A VIZ C'HWEVRER

10e00 : Ar gêr he 4000 botez (La Quincail' Cie.) > Ehan barzhoniel
13e30 : Miche ha Drate : Komzoù gwenn (Kompagnunezh La langue dans l'O) > C'hoariva
16e00 : Asambles (Kompagnunezh Jupou) > Sirk
20e30 : Un dro da lec'h all (Siian) > Beaj gant sonerezh eus Kreiz Azia da Amerika
21e45 : Ezfredet eus ti Renault > Kanaouennoù

YAOU 5 A VIZ C'HWEVRER

9e30 : War ar genoù (Kompagnunezh Le grand appétit) > C'hoariva
10e30 : Ur pennad hent (Soig Siberil) > Beaj sonerezh diabarzh (abadennoù miret evit ar skolidi)
14e00 : Queen Kong (Kompagnunezh La Bazooka) > Dañs

Kavit roll an abadennoù-se dre ar munud el lec'hienn :
www.bretagneenscenes.com

Aozet gant : ar c'hevread Breizh war al Leurenn(où)

SAMEDI 7 FÉVRIER

JEAN YVES LAFESSE

DÉTRAQUÉ

20H30
AMPHI GLENMOR

HUMOUR

Jean Yves Lafesse monte sur scène pour soigner son trac. Il va devoir se battre pour empêcher Mme Ledoux de s'accaparer le spectacle. La bataille sera rude, la vieille a de la ressource !

Réputé pour ses canulars téléphoniques et ses micros-trottoirs osés, Jean Yves Lafesse n'a jamais cessé de triompher depuis ses débuts à la radio en 1981 et ensuite sur Canal +, Europe 1, Rire et chansons. Avec un talent et une poésie uniques dans l'art de l'improvisation, il est aujourd'hui l'un des humoristes préférés des Français.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.
Un tarif réduit est cependant proposé aux personnes abonnées à l'Espace Glenmor.

Coréalisation Espace Glenmor, Anim15 Prod

TP : 30 € / TA : 27 €

www.anim15.com





SADORN 7 A VIZ C'HWEVRER **JEAN YVES LAFESSE** **DIREIZHET**

20E30
AÑFI GLENMOR

FENT

Emañ Jean Yves Lafesse o vont war al leurenn evit
pareañ diouzh e fourm. Ret e vo dezhañ stourm evit
mirout ouzh an itron Ledoux da aloubiñ al leurenn.
Start e vo an traoù rak startijenn a zo en hini gozh !

Jean Yves Lafesse, brudet evit e fentigelloù dre
bellgomz hag e abadennoùigoù hardizh ha dichek ma
vez oc'h atersiñ tud war ar straed, n'en deus ket
paouezet d'ober berzh abaoe 1981, p'en doa kroget
da labourat er skingomz ha goude-se e Canal +,
Europe 1, Rire et Chansons. Gant donezonoù kaer hag
ur varzhoniezh dezhañ e-unan war dachenn ar
primaozañ eo deuet da vezañ unan eus ar
fentigelloerien a blij ar muiañ d'ar Frañsisien.

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ
Prizioù digresket a vez kinniget koulskoude d'an dud koumanantet el
Leurenn Glenmor.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Anim15 Prod

SAMEDI 14 FÉVRIER

TOTORRO + WICKED

21H00

KLUB

MUSIQUES ACTUELLES

Totorro s'incruste avec classe et décontraction dans le paysage post-rock français et s'affirme comme une des valeurs sûres du rock stellaire en France et hors de nos frontières. Ce groupe vient défier Mogwai et consort sur leurs terres. Le quatuor fait le pont entre post-rock/screamo passionné et mélodies emo. Une ambivalence qui les rend à la fois accrocheurs et intenses, légers et heavy. Sur scène l'union est palpable, le son fait bloc et le public repart toujours bluffé. Pas de chant - ou à de rares reprises - c'est instrumental mais jamais rébarbatif, compliqué mais toujours accrocheur. Découvrez en première partie de soirée les Wicked et leur univers blues rock proche de celui des Black Keys.

Partenariat Espace Glenmor, CLAJ, Les Vieilles Charrues

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.



www.totorro.bandcamp.com
www.zikcard.com/wicked

TU : 5 €



HFTW



SADORN 14 A VIZ C'HWEVRER **TOTORRO + WICKED**

21E00

KLUB

SONEREZH A VREMAÑ

Emañ Totorro oc'h ober gwrizioù, hag eñ kran ha dibalamour war un dro, e bed ar post-rock gall. Bez' eo unan eus ar strolladoù rock gwellañ e Frañs ha pelloc'h. Emañ ar strollad-se o vont da zichekal Mogwai hag e genseurded war o douaroù. Ar pevarad a ra al liamm etre ar post-rock-screamo entanet hag ar sonennoù emo. Ur forc'hellegezh a ra anezho tud dalc'hus ha birvidik, skañv ha heavy war un dro. War al leurenn e santer e vezont a-unan, dispar eo o son ha souezhet e vez an arvesterien atav pa vezont o vont kuit. Ne ganont ket - pe ral a wech -, tonioù hepken a vez sonet ganto hep bezañ dic'hras gwech ebet, traoù luziet met a ro c'hoant d'an dud da dommañ outo.

Grit anaoudegezh, el lodenn gentañ eus an nozvezh, gant ar Wicked hag o bed blues rock tost da hini ar Black Keys.

Kenlabour etre al Leurenn Glenmor, ar SDAY hag an Erer Kozh

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ



JEUDI 26 FÉVRIER
ONE SHOOT
CIE. LASKO
20H30
AMPHI GLENMOR
THÉÂTRE

Un homme est revenu. Il a survécu à l'enfer, une guerre quelque part dans le monde. Et c'est là qu'on le découvre. Il flotte entre deux mondes, entre le passé et le présent : lui, un bonsaï, une bassine, de l'eau, une robe, une musique qui revient sans cesse.

Cet homme s'accroche, se replie, exulte, tombe et se relève. C'est ce parcours que l'on refait avec lui, pas à pas, emporté par un tourbillon de corps et de bruits. Cet homme nous raconte à sa manière le labyrinthe de l'indicible. Et une ultime question se pose en le regardant: comment rester du côté de la vie ?

À partir de 15 ans

TP : 10 € / TA : 7 € / TR : 7 € / TS : 5 €

YAOU 26 A VIZ C'HWEVRER

ONE SHOOT KZH. LASKO

20E30
AÑFI GLENMOR
C'HOARIVA

Un den zo distroet. Bev eo chomet war-lerc'h an ifern, ur brezel un tu bennak er bed. Hag eno eo e reer anaoudegezh gantañ. Emañ o nijal etre daou ved, etre an tremened hag ar bremañ : eñ, ur bonzai, ur vasin, dour, ur sae, un ton hag a zistro dibaouez. Emañ an den-se o terc'hel peg, o'n em enkañ warnañ e-unan, o tridal, o kouezhañ hag o sevel en-dro. An hent-se a reer gantañ en-dro, kammed-ha-kammed, kaset gant ur barrad korfoù ha trouzioù. Kontañ a ra an den-se dimp, en e zoare, milendall an dreistlavar. Hag ur goulenn diwezhañ a saver en ur sellet outañ : penaos chom en tu-mañ d'ar vuhez ?

Adalek 15 vloaz

9

PL : 10 € / PK : 7 € / PD : 7 € / PS : 5 €

MERCREDI 4 MARS
KATELL IGRUZ
C'HOARIVARI LANGEDIG

20H30
AMPHI GLENMOR

THÉÂTRE EN BRETON

Il était une fois... une adolescente d'aujourd'hui,
gothique, insoumise et insouciante...
Des rendez-vous inattendus... Mais jusqu'où ira
t-elle ?

Se fera t-elle attraper par le loup ?

En tout cas, dans le quartier, les commérages
vont bon train.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule
d'abonnement.

Coréalisation Espace Glenmor, Lycée Diwan



TU : 5 €

BILLETTERIE EN VENTE SUR PLACE.



MERC'HER 4 A VIZ MEURZH **KATELL IGRUZ**

C'HOARIVARI LANGEDIG

20E30

ANFI GLENMOR

C'HOARIVA E BREZHONEG

Ur wech e oa, ur wech ne oa ket, ur wech e oa
bepred... ur grennardez a vremañ, gotek, disuj ha
disoursi an tamm anezhi...

Emgavioù dic'hortoz... Met betek pelec'h ez aio ?
Daoust hag-eñ e vo tapet gant ar bleiz ?

Mod pe vod, mont a ra an teodoù en-dro er c'harter.

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, al lise Diwan

DIMANCHE 8 MARS

ANIMAL FYESTA

PIANO CHAT & COCKTAIL PUEBLO

16H00

AMPHI GLENMOR

CONCERT FÊTE PARTICIPATIF

Orchestré par l'artiste tourangeau Piano Chat, entouré des musiciens du collectif Cocktail Pueblo, « Animal fYESTa » invite les enfants à participer à un concert sur le thème de la fête et de la joie. Des dessins, des lumières féeriques, un canon à confettis, et aussi des léopards et des jaguars jouant des maracas, et puis des masques en têtes d'ananas et de tigres, d'étonnants instruments de musique à gros boutons et de drôles de paroles pour danser comme des fous !

Entourée par le public, cette joyeuse ménagerie enchaîne les jeux et les tours de passe-passe, prétextes à une douce folie maîtrisée, invite le public à lâcher prise et à interagir sur le déroulement du spectacle (grâce à des dispositifs techniques et des jeux). N'hésitez pas à venir déguisé aux couleurs de votre fruit ou animal préféré, n'oubliez pas vos chaussettes et venez danser !

À partir de 6 ans

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

Partenariat Espace Glenmor, CLAJ, Les Vieilles Charrues



© L. BARBIER

12

www.armada-productions.com

TU : 5 € / GRATUIT POUR LES ACCOMPAGNATEURS DES ENFANTS



13

SUL 8 A VIZ MEURZH **ANIMAL FYESTA** **PIANO CHAT &** **COCKTAIL PUEBLO**

16E00

AÑFI GLENMOR

SONADEG FEST ASAMBLES
GANT AN DUD

« Animal fYEstA », kempennet gant Piano Chat, un arzour eus Touren hag a zo eilet gant sonerien eus ar c'henstrollad Cocktail Pueblo, a bed ar vugale da gemer perzh en ur sonadeg diwar-benn ar fest hag al levenez. Tresadennoù, gouleier marzhus, ur c'hanol-koñfeti, hag ivez louparded ha jagoared o seniñ marakas, ha neuze maskloù e stumm pennoù ananaz ha tigned, binvioù-seniñ souezhus gant pikolioù boutonoù ha komzoù iskis evit dañsal evel tud diskiantet !

Diskouez a ra ar skipailh laouen-se, gronnet gant an arvesterien, c'hoarioù ha troioù-sigotañ an eil re war-lerc'h ar re all, ganto barradoù follentez mestroniet a-dra-sur. Peditañ a reont an dud da ziskregiñ ha da gaout darempred ganto evit lakaat an abadenn da gemm (gant stignadoù teknikel ha c'hoarioù). Deuit, hep tortañ, treuzwisket gant dilhad a-liv gant ho frouezh pe ho loen muiañ-karet. Arabat eo deoc'h disoñjal ho loeroù war ho lerc'h ha deuit da zañsal !

Adalek 6 vloaz

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor, SDAY, An Erer Kozh

SAMEDI 21 MARS

ESPÈCES MENACÉES

THÉÂTRE

DE L'ENTRACTE

20H30
AMPHI GLENMOR
THÉÂTRE

Yvon, comptable, revient du travail et échange par erreur dans le RER sa serviette contre une autre identique. Cette dernière contient une forte somme d'argent. C'est la chance de sa vie et il a bien l'intention d'en profiter ! Mais tout ne sera pas si simple, car c'est aussi le jour de son anniversaire et il a invité des amis...

Pièce de Ray Cooney, adaptée en France par Gérard Jugnot et Michel Blanc.

Avec Jean Paul Gourlay, Gwennaëlle Tanguy, Jeanine Le Bomin, Michel Jan, Roland Simon, Bruno Jan et Bastien Cougard.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

Organisation : Lions club



TU : 10 €



SADORN 21 A VIZ MEURZH **SPEADOÙ EN ARVAR** **TEATR AN EHAN**

20E30
AÑFI GLENMOR
C'HOARIVA

Emañ Yvon, ur chontour anezhañ, o tistreiñ diouzh e labour hag eskemm a ra e sac'h-lêr, dre fazi, ouzh unan all heñvel-mik en RHR*. Ur sammad bras a arc'hant zo e-barzh. Ar voul a zo gantañ hag emañ gant ar soñj ober e vad eus se ! Met ne vo ket ken aes-se rak hiziv emañ e zeiz-ha-boaz ivez ha pedet en deus mignoned...

Pezh skrivet gant Ray Cooney, azasaet e Frañs gant Gérard Jugnot ha Michel Blanc.

Gant Jean Paul Gourlay, Gwennaëlle Tanguy, Jeanine Le Bomin, Michel Jan, Roland Simon, Bruno Jan ha Bastien Cougard.

*RHR = Rouedad herrek rannvroel

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantif

Aozet gant : Lions club

DIMANCHE 22 MARS
ROZENN TALEC &
YANNIG NOGUET

+
SOÏG SIBÉRIŁ & ÉRIC
LEGRET

UN BOUT DE CHEMIN

17H00

AMPHI GLENMOR

MUSIQUES TRADITIONNELLES

Aujourd'hui à l'occasion de la sortie de son dixième album "DEK", Soïg Sibéřil met l'accent sur son nouveau projet solo pour vous embarquer dans un road movie. Des rencontres, des voyages qu'il vous fera partager avec sa guitare. À la croisée des arts visuels et de la musique, ce spectacle mêle récits et projections d'images, jeux d'ombres et de lumières, interactions entre la scène et le public, pour créer un univers original et insolite.

Valse ou gavotte aguichante ? Rozenn Talec et Yannig Noguét vous invitent au cœur d'un libertinage musical ! Puisant dans leurs répertoires et inspirations respectives ils proposent un concert composé de chansons traditionnelles, mais aussi de paroles écrites par Rozenn. Leur musique se veut être le reflet de leurs parcours, de leurs ressentis, entre racine et voyage. Dans cet univers où la gwerz rencontre le tango, l'énergie et la complicité sont leurs maîtres mots.



TP : 13 € / TA : 10 € / TR : 10 € / TE : 7 €

16

www.soigsiberil.com



SUL 22 A VIZ MEURZH ROZENN TALEG & YANNIG NOGUET + SOÏG SIBÉRIL & ÉRIC LEGRET UR PENNAD HENT

17E00

ANFI GLENMOR

SONEREZH HENGOUNEL

Pa zeu e zekved albom "DEK" er-maez, e laka Soig Siberil ar pouez war e raktres solo nevez evit lakaat ac'hanoc'h da vont asambles gantañ en ur road movie, un arvest hent, hini Soig Siberil.

Emgavioù, beajoù gant sonerezh a lakaio ac'hanomp da rannañ gantañ war-bouez e c'hitara ha kas a raio ac'hanomp pell, pell-kenañ diouzh ar gwenodennoù balizennet ! E kroashent an arzoù gwelet hag ar sonerezh ez eus mesket en arvest-se, anvet « Ur pennad hent », danevelloù ha skeudennoù bannet, c'hoarioù gouloù hag amc'houloù, darempredoù etre al leurenn hag an arvesterien, evit krouiñ ur bed dibar ha digustum.

Valsenn pe gavotenn sev ? Rozenn Taleg ha Yannig Nogueta a bed ac'hanoc'h e-kreiz ur veaj sonerezh diroll ha disolit.

Goude bezañ dibabet tonioù pe kanaouennoù e sac'h pep hini anezho e kinnigont ur sonadeg savet gant kanaouennoù hengounel, met ivez gant komzoù skrivet gant Rozenn. O sonerezh a zo skeudenn o hentou, o santadurioù, etre gwriazienn ha beaj. Er veaj-se ma vez ar gwerzioù o kejañ ouzh an tango ez eo ar startijenn hag al labour a-unvan o ger-stur.

PL : 13 € / PK : 10 € / PD : 10 € / PB : 7 €

**VENDREDI 3 AVRIL
ORCHESTRE
SYMPHONIQUE
DE BRETAGNE
MOZART
EN BOHÈME**

**DIRECTION & VIOLON : GILLES
APAP**

20H30

AMPHI GLENMOR

MUSIQUES CLASSIQUES

Inclassable musicien franco-américain, Gilles Apap est l'interprète idéal pour ce programme construit autour de Mozart le bohémien, compositeur aussi facétieux que génial. Curieux de toutes les musiques, qu'il interprète avec une joie égale, de la musique tzigane aux mélodies celtiques, Gilles Apap prendra le répertoire mozartien comme point de départ pour un tour du monde musical. Il sera ici au violon et à la baguette pour diriger l'OSB. Nul doute que sa fertile imagination saura rendre à Mozart un hommage inattendu !

Coréalisation Espace Glenmor,
Orchestre symphonique de Bretagne



TP : 17 € / TA : 15 € / TR : 15 € / TE : 10 €



GWENER 3 A VIZ EBREL

LAZ-SENIÑ

SINFONEK BREIZH

MOZART AR JIPSIAN

RENEREZH & VILOÑS : GILLES APAP
20E30

AÑFI GLENMOR

SONEREZH KLASEL

Gilles Apap, ur soner gall-hag-amerikan na c'haller lakaat e rummad ebet, eo ar c'haner dreist a c'hortozer evit ar programm-se savet gant tonioù Mozart ar Jispian, ur sonaozer bourdus koulz hag ijinus. An holl vuzikoù a vez karet gantañ ha plijadur vras en devez o seniñ anezho, eus ar muzik jipsian d'ar sonennoù kelt. Kregiñ a raio Gilles Apap e abadenn gant tonioù Mozart da gentañ evit ober tro bed ar muzikoù . Seniñ a raio violoñs ha ren a raio laz-seniñ sinfonek Breizh war un dro. Hep mar na marteze e ouio ar paotr leun a ijin a zo anezhañ dougen bri da Mozart en un doare dic'hortoz !

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor,

*Laz-seniñ sinfonek Breizh

PL : 17 € / PK : 15 € / PD : 15 € / PB : 10 €

DIMANCHE 5 AVRIL

**ABEILLES
ET BOURDONS
NID DE COUCOU**

11H00 & 15H30

KLUB

CONTE LYRIQUE AU GOÛT DE MIEL

C'est aujourd'hui le grand jour ! La nouvelle petite reine des abeilles va devoir choisir un bourdon qui deviendra le fameux bourdon-papa. Mais à la ruche, pas un bourdon ne plaît à la reine. Elle envoie alors ses alliés les papillons chercher un bourdon royal là-bas, de l'autre côté de la plaine fleurie. Pris dans une terrible tempête, les papillons se perdent dans un bois. C'est là qu'il vit, tranquille et solitaire.

Qui ? Le beau bourdon-des-bois... La reine en tombe éperdument amoureuse mais chez les abeilles, le bourdon meurt en devenant papa. Elle devra choisir entre l'amour de ses rêves et la survie des petites abeilles.

À partir de 4 ans

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

Coréalisation Espace Glenmor, Échanges et Cie.



TU : 1 €

BILLETTERIE EN VENTE SUR PLACE.



SUL 5 A VIZ EBREL **GWENAN HA TADOÙ GWENAN NID DE COUCOU**

11E00 & 15E30

KLUB

**KONTADENN LOURENNEK GANT
BLAZ AR MEL**

Hiziv emañ an deiz bras ! Rouanez vihan nevez ar gwenan zo ret dezhi dibab ur gwaz hag a zeuio da vezañ an tad-gwenan gloriüs. Met er ruskenn ne blij tad-gwenan ebet d'ar rouanez. Neuze e kas he mignonezed, ar balafenned, da gerc'hat un tad-gwenan roueel du-hont, en tu all d'ar gompezenn bokedet. Ar balafenned, tapet gant un taol-amzer, en em goll en ur c'hoad. Eno eo emañ o vevañ, sioul hag en e-unan.

Piv ? Ar c'haer a dad-gwenan-ar-c'hoad... Kouezhañ a reas ar rouanez e karantez gantañ dreist-penn met e bed ar gwenan e varv ar pared pa zeuont da vezañ tad. Rankout a raio ar rouanez dibab etre he c'haredig ha lakaat gwenan bihan da vevañ.

Adalek 4 bloaz

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Échanges et Cie.

PU : 1 €

GWERZHET E VO AR BILHEDOÙ WAR AL LEC'H.

DIMANCHE 12 AVRIL
SHARON SHANNON
& ALAN CONNOR

17H00

AMPHI GLENMOR

MUSIQUES IRLANDAISES

Sharon Shannon est l'une des musiciennes les plus attachantes d'Irlande. Virtuose de l'accordéon diatonique depuis toute jeune, elle devient très vite une figure incontournable à travers des collaborations avec, notamment, les Waterboys et Kate Bush.

Célébrant 21 années de tournées depuis son premier album, Sharon nous emmène dans un voyage rétrospectif, rejoint sur scène par le multi-instrumentiste et chanteur Alan Connor. Une combinaison étincelante, avec l'accordéon déchirant de Sharon et le jeu électrique d'Alan qui procure une énergie et un son à la fois puissant et captivant.

Coréalisation Espace Glenmor, Naïade Productions



www.sharonshannon.com

TP: 23 € / TA: 20 € / TR: 20 € / TE: 15 €



SUL 12 A VIZ EBREL **SHARON SHANNON & ALAN CONNOR**

17E00

AÑFI GLENMOR

SONEREZH EUS IWERZHON

Sharon Shannon zo unan eus ar sonerezed hoalusañ eus Iwerzhon. Ur mailh war an akordeoñs diatonek eo a-vihanik ha buan-tre eo deuet da vezañ ur sonerez veur goude bezañ kenlabouret gant ar Waterboys ha Kate Bush peurgetket.

Sharon, lidet ganti 21 bloavezhiaed a drojadoù abaoe hec'h albom kentañ, a gas ac'hanomp d'ober ur veaj war-gil, asambles gant ar soner liesvenveg ha kaner Alan Connor a vo ganti war al leurenn. Ur meskaj skedus, gant akordeoñs fromus Sharon ha gant c'hoari tredan Alan a ro startijenn hag ur son kreñv ha dedennus war un dro.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Naïade Productions



SAMEDI 25 AVRIL

MBONGWANA STAR + MARYSE NGALULA

20H30

AMPHI GLENMOR

MUSIQUES DU MONDE

Nous avons accueilli en 2011 le Staff Benda Bilili dans une salle surchauffée !

Aujourd'hui, les deux principaux auteurs-compositeurs de cette formation, Coco Yakala Ngambali et Théo Nzonga Nsutuvuidi débarquent en Europe avec leur nouveau groupe : « Mbongwana Star ». 8 musiciens, un tempo à réveiller toutes les salles de bals du kreiz Breizh, sur fond de funk, rock & afro beat "made in Kinshasa"! Ils arrivent, impatients de retrouver leur public, avec un album tout chaud intitulé "1000000 c'est quoi ?"

Retrouvez en première partie de soirée Maryse Ngalula. Aujourd'hui entre Kinshasa, Bruxelles et Paris, c'est en Afrique du Sud qu'elle enregistre il y a 10 ans son premier album et y remporte le prix de la Francophonie. A Johannesburg elle devient musicienne intervenante dans le township de Soweto, se nourrit de non-violence, dénonce la condition des femmes africaines avec guitare et voix pour seules armes. Maryse Ngalula enregistre actuellement son nouvel album sous la direction artistique de Ray Lema. Des compositions chantées principalement en Tshiluba (sa langue maternelle), en Lingala et swahili.

Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher





SADORN 25 A VIZ EBREL **MBONGWANA STAR + MARYSE NGALULA**

20E30

AÑFI GLENMOR

MUZIKOÙ EUS AR BED

Degemeret hor boa ar Staff Benda Bilili en ur sal
entañet e 2011 !

Hiziv emañ an daou aozer ha sonaozer pennañ eus
ar strollad-se, Coco Yakala Ngambali ha Theo Nzonza
Nsutuvuidi, o'n em gavout en Europa gant o strollad nevez :
« Mbongwana Star ». 8 soner, gant un tempo da zihuniñ an
holl dud a zo e-barzh salioù dañs Kreiz-Breizh, diwar un
tamm funk, rock & afro beat « graet e Kinshasa » ! En em
gavout a reont, mall warno da adkavout o arvesterien, gant
un albom nevez-flamm a zo anvet « 1000000 c'est quoi ? »

El lodenn gentañ eus an nozvezh, grit anaoudegezh gant
Maryse Ngalula. En deiz hiziv emañ en un tu bennak etre
Kinshasa, Brusel ha Pariz. E Suafrika he doa enrollet hec'h
albom kentañ dek vloaz zo hag eno he doa gounezet priz ar
Gallegañ. E Johannesburg eo deuet da vezañ ur sonerez
emellerez e township Soweto. En em vagañ a ra diwar an
nann-feulster, sevel a ra a-enep dere ar merc'hed afrikan
gant he gitar hag he mouezh, hec'h armoù nemeto. Er mare-
mañ emañ Maryse Ngalula oc'h enrollañ hec'h albom nevez
dindan renerezh arzel Ray Lema. Sonaozennoù kanet dreist-
holl e Tshiluba (he yezh-vamm), e Lingala hag e Swahili.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, ar Plañchod

PL : 15 € / PK : 13 € / PD : 13 € / PB : 10 €



DIMANCHE 26 AVRIL
DOCTEUR JEKYLL
& MR HAYDN

17H00

AMPHI GLENMOR

OPÉRA POUR ENFANTS

L'École de musique du Poher, l'École de musique, de danse et théâtre du Kreiz breizh et l'École de musique du Pays du Roi Morvan, se retrouvent autour d'un projet pédagogique et artistique commun, "Docteur Jekyll et Mr Haydn", un opéra pour enfant de Claude Henri Joubert.

Une soixantaine d'élèves, musiciens et chanteurs, issus de ces 3 écoles travaillent tout au long de l'année sous la direction pédagogique et artistique de leurs professeurs et du metteur en scène professionnel Jean Quiclet.

Partenariat Espace Glenmor, École de musique du Poher, CLAJ



GRATUIT



SUL 26 A VIZ EBREL **DOCTEUR JEKYLL & MR HAYDN**

17E00

AÑFI GLENMOR

OPERA EVIT AR VUGALE

Skol sonerezh ar Poc'hêr, Skol sonerezh, dañs ha c'hoariva Kreiz-Breizh ha Skol sonerezh bro ar Roue Morvan, en em gav asambles tro-dro d'ur raktres pedagogel hag arzel boutin, Docteur Jekyll ha Mr Haydn, un opera evit ar vugale gant Claude Henri Joubert.

Un tri-ugent a skolidi, sonerien ha kanerien, deuet eus an 3 skol-se a labour a-hed ar bloaz dindan renerezh pedagogel hag arzel o c'helennerien hag al leurenner a vicher Jean Quiclet.

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor, Skol sonerezh ar Poc'hêr, SDAY

JEUDI 7 MAI

SOLEO

10H30 & 14H00
AMPHI GLENMOR

MUSIQUE EN MOUVEMENT

Hop, hop, hop ! Trois voisins, mêlant allègrement rêve et réalité, s'activent, se rencontrent, se percutent et confrontent leurs univers en musique. Percussions corporelles, vibraphone, voix, claviers et guitares au service du délire, de la poésie, de l'humour et de l'amour. Voici donc une rencontre chorégraphiée et théâtralisée entre l'ailleurs et l'ici, la musique et le mouvement, le spectacle et le concert. Le son se voit autant que le geste s'entend. C'est une performance qui nous fait osciller entre rire et émerveillement, mais aussi une invitation de haut vol au voyage intérieur, au partage et à la rencontre de l'autre.

Partenariat Espace Glenmor, Jeunesses Musicales de France



© W. BELLE

28

www.soleo-info.com

SÉANCES SCOLAIRES, SE
RENSEIGNER AUPRÈS DE NOTRE
SECRETARIAT.



29

YAOU 7 A VIZ MAE

SOLEO

10E30 & 14E00
AÑFI GLENMOR

SONEREZH O FIÑVAL

Hop, hop, hop ! Tri amezeg, hag a gemmesk ent-laouen hunvre ha gwirvoud, a gejj an eil gant egile, a ya da skeiñ an eil e-barzh egile hag a laka o bedoù en ur geñver an eil ouzh egile gant sonerezh. Toserezh korfel, vibrafon, mouezh, klavieroù ha gitaroù e servij an ambren, ar varzhoniezh, ar fent hag ar garantez. Setu neuze un emgav korollet ha c'hoarivaelaet etre al lec'h all hag al lec'h-mañ, ar sonerezh hag al lusk, an arvest hag ar sonadeg. Gwelet e vez ar son kement ha ma vez klevet ar jestroù. Un abadenn eo hag a laka ac'hanomp da vrallañ etre ar c'hoarzhin hag an estlammañ, met ivez ur bedadenn dispar da ober ur veaj diabarzh, da genlodennañ traoù ha da vont da gejañ ouzh ar re all.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor,
Yaouankizoù Sonerezh Frañs

ABADENNOÙ EVIT AR SKOLIDI, GOULENN
TITOUROÙ OUZH HOR SEKRETOURIEZH.

VENDREDI 15 MAI
DAVID KRAKAUER
KRAKAUER'S
ANCESTRAL GROOVE

20H30

AMPHI GLENMOR

MUSIQUE KLEZMER

Clarinettiste virtuose, David Krakauer est aujourd'hui l'une des figures les plus emblématiques et talentueuses de la nouvelle musique Klezmer (rencontre entre la musique juive d'Europe de l'Est et le jazz de New Orleans revisité par New York). Il réinvente la musique de ses ancêtres avec un mélange de funk, de jazz et d'électro, abolissant les frontières entre les genres. Accompagné de quatre membres du Madness Orchestra, il s'attaque avec brio à une musique entraînante, virtuose et inventive qui mêle des compositions originales et certains de ses grands classiques, libérant sur scène une énergie extrêmement contagieuse !

Clarinette, voix : David Krakauer
Samplers, boîtes à rythme, voix : Keepalive
Guitare électrique : Sheryl Bailey
Basse : Jerome Harris
Batterie : Michael Sarin

Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher



© GMD

TP : 15 € / TA : 13 € / TR : 13 € / TE : 10 €

www.davidkrakauer.com

GWENER 15 A VIZ MAE
DAVID KRAKAUER
KRAKAUER'S
ANCESTRAL GROOVE

20E30

AÑFI GLENMOR

SONEREZH KLEZMER

David Krakauer, ur mailh war ar glarinetenn, zo unan eus ar sonerien arouezusañ ha donezonetañ eus ar sonerezh Klezmer (ur gejadenn etre ar sonerezh yuzev eus Reter Europa hag ar jazz eus New Orleans adwelet e New York). Adkrouiñ a ra sonerezh e hendadoù gant ur meskaj funk, jazz ha sonerezh elektronek, ha freuzañ an harzoù etre an doareoù. Eilet gant pevar ezel eus ar strollad Madness Orchestra, stagañ a ra hardizh gant ur sonerezh lañsus, leun a ampartiz hag a ijin hag a gemmesk sonaozennoù dibar ha lod eus e donioù milanavezet, ha lezel a ra ur startijenn pegus-kenañ da vont war al leurenn !

Klarinetenn, mouezh : David Krakauer
 Sampleroù, boestadoù luskou, mouezh : Keepalive
 Gitar tredan : Sheryl Bailey
 Boudenn : Jerome Harris
 Toumperezh : Michael Sarin

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, ar Plañchod

PL : 15 € / PK : 13 € / PD : 13 € / PB : 10 €

JEUDI 21 MAI
**YANN-FAÑCH
 KEMENER**
**NOUS IRONS PLEURER
 SUR VOS OMBRES**

20H30

AMPHI GLENMOR

THÉÂTRE MUSICAL

Le désir de ce spectacle est né d'une découverte familiale, celle de l'histoire d'un grand-oncle, enrôlé de force à l'été 1918 et jeté dans un train en partance pour le front. Comme pour des milliers de ses compatriotes, la mémoire de ce guerrier malgré lui, ne survivra pas au conflit. Plus aucune trace dans les archives, simplement l'ombre d'un soldat devenu un «sans-voix»... Remontant le fil de la tourmente, Yann-Fañch Kemener s'est plongé dans cette sombre période, collectant tour à tour les souvenirs, les témoignages, les poèmes, les chants et les photographies de l'époque. Les carnets de notes du soldat Gaston Certain, les photos jaunies d'Yves Troadec, les correspondances de Louis Guilloux nous parlent du quotidien de ces soldats, des brimades des gradés de la caserne à l'encontre des bretons souffre-douleur, mais aussi de la faim, du froid et de la mort qui rôde, omniprésente.

« Raconter la vie de quelqu'un, c'est toujours lui redonner une certaine dignité » nous rappelle le chanteur. Avec beaucoup de sensibilité et de pudeur, il nous invite à suivre son héros, perdu dans les décombres de la civilisation. Accompagné par le flûtiste Sylvain Barou, en français ou en breton, Yann-Fañch Kemener dessine un voyage musical poignant.

À partir de 15 ans



www.kemener.com

TP : 10 € / TA : 7 € / TR : 7 € / TS : 5 €



© JC DRUAIS

YAOU 21 A VIZ MAE **YANN-FAÑCH KEMENER** **GOUELIT MA DAOULAGAD**

20E30

AÑFI GLENMOR

C'HOARIVA SONEREZH

C'hoant zo deuet dezhañ da sevel an abadenn-se goude bezañ graet anaoudegezh gant un istor c'hoarvezet en e familh, da lavaret eo istor ur goureontz dezhañ hag a oa bet enrollet dre heg en hañv 1918 ha taolet e-barzh un tren da vont d'an talbenn. Evel evit miliadoù eus e genvroidi ne chomo eñvor ebet eus ar brezelour en desped dezhañ goude ar brezel. Roud ebet ken en dielloù, nemet skeud ur soudard deuet da vezañ un den « divouezh »...Yann-Fañch Kemener, o tibunañ neudenn an trubuilhoù-se, zo en em lakaet da studiañ ar mare teñval-se. Gantañ ez eus bet dastumet, a-bep-eil, eñvorennoù, testenioù, barzhonegoù, kanaouennoù ha luc'hskeudennoù eus ar mare-se. Karnedoù notennoù ar soudard Gaston Certain, luc'hskeudennoù melenet Yves Troadeg, lizheroù Louis Gwilhouz a gomz deomp eus buhez pemdeziek ar soudarded-se, eus heskinadennoù ofiserien hag isofserien ar gazarn a-enep ar Vretoned chas, met ivez eus an naon, ar yenijenn hag ar marv o troidellañ tro-dro, e pep lec'h. « Kontañ buhez unan bennak zo bepred adreiñ un tamm dinentez dezhañ » eme ar c'haner. Gant kalz a gizidigezh hag a elevez e ped ac'hanomp da vont war roudoù e haroz, kollet en atredoù ar sevenadurezh. Yann-Fañch Kemener, eilet gant ar soner fleüt Sylvain Barou, a zibun, e galleg hag e brezhoneg, ur veaj fromus gant sonerezh.

Adalek 15 vloaz


SAMEDI 20 JUIN
FÊTE DE LA
MUSIQUE
PLACE DES DROITS DE L'HOMME
(CENTRE VILLE)

Retrouvez prochainement la
programmation de ce rendez-vous
sur notre site internet :
www.glenmor.fr

Partenariat Espace Glenmor,
École de musique du Poher, CLAJ, association
Tro Karaez

GRATUIT





SADORN 20
A VIZ MEZHEVEN
GOUEL
AR SONEREZH
PLASENN GWIRIOÙ MAB-DEN
(KREIZ-KÊR)

A-benn nebeut e c'halloc'h kavout
programm an emgav-se en hol
lec'hienn Genrouedad :
www.glenmor.fr

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor, Skol
sonerezh ar Poch'hêr, SDAY, ar gevredigezh Tro
karaez

23 - 30 AOÛT & 6 SEPTEMBRE **SAISON MUSICALE À L'ÉGLISE DE PLOUGUER**

18H00

ÉGLISE DE PLOUGUER

**MUSIQUES CLASSIQUES
ET TRADITIONNELLES**

Venez profiter de l'acoustique généreuse de l'église de Plouguer ! Cette quatrième saison mêle à nouveaux les genres ! Chansons et standards prolongés par de brillantes improvisations instrumentales, mélodies classiques de compositeurs bretons remises au goût du jour et pièces pour clavecin redonnant vie à quelques joyaux du 18^e siècle.

Coréalisation Ville de Carhaix, Espace Glenmor, Sillage Musiques

DIMANCHE 23 AOÛT :

CLARIDÉON

Standards, chansons, tango, swing et improvisations

Avec : Yann Le Bihan (accordéon chromatique), Guillaume Kermanac'h (clarinette)

DIMANCHE 30 AOÛT : MÉLODIES

Joseph Guy Roparz et Jean Cras revisités

Avec : Isabelle Diverchy (voix), Céline Rivoal (accordéon), Dominig Bouchaud (harpe celtique), Estelle Walter

DIMANCHE 6 SEPTEMBRE :

AUTOUR DU CLAVECIN

"Pièces de Clavecin en Concert" de Jean-Philippe Rameau

"Parnasse ou l'Apothéose de Monsieur de Corelli" de François Couperin.

Avec : Edith Gamard (clavecin), Adeline Rognant (viole de gambe), Awami Erwan Kollo (violon baroque), Guillaume Handel (traverso)

36



BILLETTERIE SUR PLACE.

TU : 5 € / GRATUIT POUR LES MOINS DE 18 ANS

23 - 30 A VIZ EOST & 6 A VIZ GWENGOLO **KOULZAD SONEREZH EN ILIZ PLOUGËR**

18E00

ILIZ PLOUGËR

SONEREZH KLASEL HA HENGOUNEL

Deuit da selaou ar son kaer a zo en iliz Plougêr ! E-kerzh ar pevare koulzad-se e vo kemmesket an doareoù sonerezh adarre ! Kanaouennoù ha sonioù anavezet, astennet gant primaozadennoù hollgaer ouzh binvioù diseurt, sonennoù klasel savet gant sonaozourien vreizhat ha lakaet da vezañ diouzh ar c'hiz en-dro, pe c'hoazh pezhioù evit ar c'havisim o reiñ buhez d'un nebeud pezhioù kaer eus an 18^{vet} kantved.

Kensevenet gant Kêr Garaez, al Leurenn Glenmor,
Sillage Musiques

SUL 23 A VIZ EOST : KLARIDEOÑS

Standardoù, kanaouennoù, tango, swing
ha primaozadennoù

Gant : Yann ar Bihan (akordeoñs
kromatek), Guillaume Kervanac'h
(klarinetenn)

SUL 30 A VIZ EOST : SONENNOÙ

Gi Roparzh ha Yann ar C'hraz adwelet

Gant : Isabelle Diverchy (mouezh),
Céline Rivoal (akordeoñs), Dominig
Bouchaud (telenn), Estelle Walter

SUL 6 A VIZ GWENGOLO : AR C'HLAVISIM

"Sonadeg pezhioù klavisim" gant Jean-
Philippe Rameau

"Parnasse ou l'Apothéose de Monsieur
de Corelli" gant François Couperin.

Gant : Edith Gamard (klavisim), Adeline
Rognant (viol-gaol), Awami Erwan Kollo
(violoñs barok), Guillaume Handel
(traverso)



37

GWERZHET E VO AR BILHEDOÙ WAR AL LEC'H.
PU : 5 € / DIGOUST EVIT AR RE DINDAN 18 VLOAZ

SAMEDI 28 ET DIMANCHE 29 MARS

SALON DES ARTISANS DU BÂTIMENT

DE 10H00 À 19H00

2,50 € / GRATUIT POUR LES MOINS DE 16 ANS

ORGANISATION : ARTISANS DU BÂTIMENT DE CARHAIX ET
DE SES ALENTOURS

DIMANCHE 5 AVRIL

BOURSE AUX VÊTEMENTS

PRINTEMPS-ÉTÉ

DE 10H00 À 16H00

GRATUIT

ORGANISATION : ÉCHANGES ET CIE.

MARDI 26 MAI

OPTION THÉÂTRE DU LYCÉE PAUL SÉRUSIER

PRÉSENTATION DES TRAVAUX
DE FIN D'ANNÉE

20H30

GRATUIT

ORGANISATION : LYCÉE PAUL SÉRUSIER

SAMEDI 30 MAI

SPECTACLE DE LA TROUPE ARC EN CIEL : « CABARET »

20H30

6 € / 3 € POUR LES MOINS DE 12 ANS

ORGANISATION : ARC EN CIEL

SADORN 28 HA SUL 29 A VIZ
MEURZH

**SALOÑS ARTIZANED
AR SEVEL TIEZ**

EUS 10E00 DA 19E00
2,50 € / DIGOUST EVIT AR RE DINDAN 16 VLOAZ
AOZET GANT : ARTIZANED AR SEVEL TIEZ EUS KARAEZ HAG
AN TROWARDDROIOÙ

SUL 5 A VIZ EBREL

FOAR AN DILHAD

NEVEZAMZER-HAÑV
EUS 10E00 DA 16E00
DIGOUST
AOZET GANT : ÉCHANGES ET CIE.

MEURZH 26 A VIZ MAE

**DANVEZ DIBAB C'HOARIVA
AL LISE PAUL SÉRUSIER
KINNIG LABOURIOÙ DIBENN
AR BLOAVEZH**

20E30
DIGOUST
AOZET GANT : AL LISE PAUL SÉRUSIER

SADORN 30 A VIZ MAE

**ARVEST AR STROLLAD
ARC EN CIEL : "KABARED"**

20E30
6 € / 3 € EVIT AR RE DINDAN 12 VLOAZ
AOZET GANT : ARC EN CIEL

39

SAMEDI 6 JUIN
SPECTACLE DE DANSE
DE FIN D'ANNÉE

20H30

6€ / 3€ POUR LES MOINS DE 18 ANS / GRATUIT POUR LES
MOINS DE 12 ANS

ORGANISATION : CARHAIXMENT DANSE

SAMEDI 13 JUIN
MILLE ET UNE PRINCESSES

20H30

6€ / 4€ POUR LES ENFANTS

ORGANISATION : DANSE ORIENTALE SOLIDAIRE

SAMEDI 4 JUILLET
CONCERT REDNEX
1^{ÈRE} PARTIE : TYRA LOOPERS

20H30

ORGANISATION ET INFORMATIONS: ROZ AON COUNTRY /
06 74 74 83 06

LUNDI 13 JUILLET
DIGOR KALON
FEST-NOZ ET FEU D'ARTIFICE

À PARTIR DE 19H00

ESPLANADE DU CHÂTEAU DE KERAMPULH

GRATUIT

ORGANISATION : VILLE DE CARHAIX

SAMEDI 5 SEPTEMBRE
FORUM DES ASSOCIATIONS
ET BOURSE AUX AFFAIRES
SPORTIVES

DE 10H00 À 17H00

GRATUIT

ORGANISATION : VILLE DE CARHAIX, OFFICE DES SPORTS

SADORN 6 A VIZ MEZHEVEN
**ABADENN DAÑS DIBENN
AR BLOAVEZH**

20E30

6€ / 3€ EVIT AR RE DINDAN 18 VLOAZ /
DIGOUST EVIT AR RE DINDAN 12 VLOAZ AOEZET GANT :
CARHAIXMENT DANSE

SADORN 13 A VIZ MEZHEVEN
MIL PRINSEZ HAG UNAN

20E30

6€ / 4€ EVIT AR VUGALE
AOEZET GANT : DAÑS KENGRET AR SAV-HEOL

SADORN 4 A VIZ GOURE
**SONADEG REDNEX
LODENN 1AÑ : TYRA LOOPERS**

20E30

AOEZET GANT : ROZ AON COUNTRY
06 74 74 83 06

LUN 13 A VIZ GOURE
**DIGOR KALON
FEST-NOZ HA TAN-ARVEST**

ADALEK 19E00

REPER KASTELL KERAMPUILH
DIGOUST
AOEZET GANT : KÊR GARAEZ

SADORN 5 A VIZ GWENGOLO
**FORUM AR
C'HEVREDIGEZHIOÙ
HA FOAR AN TRAOÙ SPORT**

EUS 10E00 DA 17E00

DIGOUST
AOEZET GANT KÊR GARAEZ, OFIS AR SPORTOÙ

CRÉATION ARTISTIQUE

KROUIDIGEZH ARZEL

Parallèlement à la diffusion de spectacles, l'Espace Glenmor s'engage dans le soutien à la création artistique. En effet, présenter un spectacle à un public ne s'improvise pas, il doit se travailler, se mûrir. L'Espace Glenmor est ainsi mis à la disposition d'artistes dans le cadre de résidences de quelques jours à plusieurs semaines. Ce temps indispensable, permet aux compagnies de s'installer, de chercher, d'essayer, d'expérimenter, de vérifier, de se confronter, d'oser...

Uozhpenn diskouez abadennoù e ra al Leurenn Glenmor war-dro skoazellañ ar c'hrouiñ arzel. Rak kinnig un arvest dirak an dud ne vez ket graet war ar prim, ret eo labourat ha peurlipat an traoù. Gant se e c'hall an arzurien dont da chom un toullad devezhioù pe sizhunvezhioù el Leurenn Glenmor evit prientiñ ur groidigezh. Pa vez lezet amzer e-giz-se gant ar c'hompagnunezhioù e c'hallont bezañ en o aez, klask doareoù nevez, amprouiñ o dibaboù, ober eskemmoù, krediñ mont war hentoù nevez...

DU 29 JUIN AU 3 JUILLET

XXY
CIE. LASKO
THÉÂTRE

EUS AN 29 A VIZ
MEZHEVEN D'AN 3 VIZ
GOUERE

XXY
KZH LASKO
C'HOARIVA

42

DU 7 AU 11
SEPTEMBRE
**FABRIQUE À
BÉBÉ**
GAËLLE STEINBERG
SPECTACLE
PARENTS /
ENFANTS
À partir de 3 ans



EUS AR 7 D'AN 11
A VIZ GWENGOLO
LABOURADEC
BABIG
GAËLLE STEINBERG
ABADENN KERENT
/ BUGALE
Adalek 3 bloaz

DU 7 AU 11
SEPTEMBRE
PROJET PAUL
LA QUINCAIL'
CIE
THÉÂTRE



EUS AR 7 D'AN
11 A VIZ
GWENGOLO
RAKTRES
PAUL
LA QUINCAIL'
KZH.
C'HOARIVA

ACTION CULTURELLE OBEREREZHIOÙ SEVENADUREL

Au cours de la saison culturelle, des rencontres régulières avec les artistes accueillis seront organisées parallèlement aux représentations (ateliers de pratiques artistiques, répétitions publiques, programmation de spectacles « hors les murs », visites de l'Espace Glenmor ...). Des actions de sensibilisation au spectacle vivant seront également menées en direction des établissements scolaires et des structures jeunesse.



©E. LEGRET

E-kerzh ar bloavezh sevenadurel e vo aozet emgavioù ingal gant an arzourien degemeret war un dro gant an arvestoù (atalieroù pleustriñ an arzoù, pleustradegoù digor d'an dud, abadennoù « en diavaez », gweladenniñ al Leurenn Glenmor...). Kinniget e vo ivez obererezhioù a-ratozh evit ar skolioù hag an aozadurioù a labour war dachenn ar yaouankiz, d'ar re yaouank d'ober anaoudegezh gant an arvestoù bev.

S'ABONNER KOUMANANTIÑ

L'abonnement est gratuit et nominatif. Il vous suffit de choisir 3 spectacles au minimum dans la saison et vous bénéficiez ainsi du tarif abonné sur tous les autres spectacles.

44

LES AVANTAGES :

- des réductions de tarifs sur les spectacles
- place numérotée dans l'amphithéâtre et réservée
- couloir d'accès spécial abonnés qui évite la file d'attente (arriver 15 min avant le spectacle)
- abonnement à la newsletter
- gratuité sur les spectacles proposés dans le cadre des rencontres Bretagne En Scène(s)

Vous pouvez compléter votre abonnement en cours de saison tout en bénéficiant du tarif abonné

44

Digoust eo ar c'houmanant ha war anv un den hepken. Trawalc'h eo deoc'h dibab 3 abadenenn da nebeutañ er c'houlzad hag evel-se e c'hallit kaout priz ar goumananterien evit an holl abadennoù all e-kerzh ar c'houlzad.

AR SPLETOÙ :

- distaolioù prizioù evit an holl abadennoù
- plas niverennet ha miret en añfiteatr
- trepas tremen a-ratozh evit ar goumananterien, ar pezh a dalvez n'o devez ket da c'hortoz er steudad (en em gavout 15 min a-raok an abadenenn)
- koumanantiñ d'al lizher-kelaouiñ
- mont e-barzh digoust evit an abadennoù kinniget en emgavioù Breizh war Al Leurenn(où)

Gallout a rit klokaat ho koumanant ivez e-kerzh ar c'houlzad ha kaout priz ar goumananterien

S'ABONNER KOUMANANTIÑ

NOM / ANV

PRÉNOM / ANV-BIHAN

ADRESSE / CHOMLEC'H

.....

.....

.....

MEL / POSTEL :

TÉL / PGZ :

DATE DEIZIAD	SPECTACLE ARVEST	TARIF ABONNÉ PRIZ KOUMANAN- TERIEN	NOMBRE DE PLACES NIVER A BLASOÛ	TOTAL SAMMAD
26/02/14	ONE SHOOT (CIE. LASKO)	7 €		
22/03/15	SOÏG SIBÉRIK + ROZENN TALEC & YANNIG NOGUET	10 €		
03/04/15	ORCHESTRE SYMPHONIQUE DE BRETAGNE	15 €		
12/04/15	SHARON SHANNON & ALAN CONNOR	20 €		
25/04/15	MBONGWANA STAR + MARYSE NGALULA	13 €		
15/05/15	DAVID KRAKAUER	13 €		
21/05/15	NOUS IRONS PLEURER SUR VOS OMBRES (YANN FANCH KEMENER)	7 €		

BULLETIN À RENVoyer ACCOMPAGNÉ DE
VOTRE RÈGLEMENT ET D'UNE ENVELOPPE
TIMBRÉE LIBELLÉE À VOTRE ADRESSE À :

ESPACE GLENMOR
RUE JEAN MONNET
KERAMPULH
29270 CARHAIX

PAPERENN DA GAS GANT HO PAEAMANT HAG
UR GOLO-LIZHER SKRIVET HO CHOMLEC'H
WARNAÑ DA :

LEURENN GLENMOR
STRAED JEAN MONNET
KERAMPULH
29270 KARAEZ

LES SPECTACLES GRATUITS,
LES SPECTACLES SCOLAIRES,
LES SPECTACLES À TARIF UNIQUE
AINSI QUE LE SPECTACLE
« DÉTRAQUÉ » (JEAN YVES
LAFESSE) NE SONT PAS INCLUS
DANS NOTRE FORMULE
D'ABONNEMENT.

AN ABADENNOÛ DIGOUST, AN
ABADENNOÛ EVIT AR SKOLIDI,
AN ABADENNOÛ UNAN O FRIZIOÛ
HAG IVEZ AN ARVEST
« DIREIZHET » (JEAN YVES
LAFESSE) N'EMAIT KET EN
HOR FORMULENN GOUMANANTIÑ.

**TOTAL
SAMMAD**

ABRÉVIATIONS UTILISÉES :

TP : tarif plein

TR : tarif réduit

TE : tarif enfant (de 7 à 12 ans)

TA : tarif abonné

TS : Tarif scolaire

Les tarifs mentionnés n'incluent pas les frais de location appliqués lors de l'achat de places sur les réseaux de vente extérieurs (France Billet, Ticketmaster, Digitik)

TARIF RÉDUIT

Le tarif réduit est accordé, sur présentation d'un justificatif, aux : demandeurs d'emploi, allocataires du RSA, de l'AAH (adultes handicapés), étudiants, moins de 18 ans, adhérents claj, élèves et professeurs de l'école de musique du Poher et des écoles de musique du Pays COB, intermittents, groupes à partir de 10 personnes, membres des comités d'entreprise partenaires, détenteurs du pass loisirs de Poher Communauté, adhérents « Le Plancher » pour les spectacles coréalisés avec Le Plancher.

POINTS DE VENTE

ESPACE GLENMOR

Du lundi au vendredi de 9h à 12h et de 14h à 18h. Les jours de spectacle 1h avant la représentation (dans la limite des places disponibles). Nous n'effectuons pas de réservations par téléphone.

PAR CORRESPONDANCE

Précisez le spectacle, le nombre de places et les catégories de tarifs. Règlement à adresser à l'Espace Glenmor (chèque à l'ordre de l'espace Glenmor), accompagné d'une enveloppe timbrée et libellée à votre adresse, et d'un justificatif de réduction si nécessaire.

AUTRES

• CARHAIX

Espace Culturel Leclerc.

• ROSTRENE

Maison de la presse.

• GOURIN

Centre Leclerc (réseau Ticketmaster).

• AU NIVEAU NATIONAL

Réseaux Francebillet et Ticketmaster : Magasins Fnac, Carrefour, Géant, Auchan, C. Leclerc, Cora.

NOUVEAUTÉ !

OUVERTURE D'UNE BILLETTERIE EN LIGNE !

Vous pouvez désormais acheter vos places de spectacles sur internet et imprimer directement vos billets à domicile. Rendez-vous sur notre site ! (www.glenmor.fr)

À SAVOIR

L'ouverture des portes se fait 20 minutes avant le début du spectacle. Le placement est libre (sauf pour les abonnés).

Toute personne (enfant ou adulte) assistant à un spectacle doit présenter un billet au contrôle d'accès à la salle.

46

NOS PARTENAIRES CULTURELS

De nombreuses propositions de spectacles ou d'actions culturelles sont présentées en partenariat avec d'autres acteurs du territoire. Nous les remercions de leur implication et de la qualité de leur collaboration.

CLAJ : culture loisirs animation jeunesse en Poher.

École de musique intercommunale du Poher.

Le Plancher : scène du Kreiz Breizh.

Les Vieilles Charrues.



SONT ÉGALEMENT PARTENAIRES DE LA SAISON CULTURELLE :

Ville de Carhaix, Jeunesses Musicales de France, Fédération Bretagne En Scène(s), Anim15 Prod, Lions Club, Orchestre symphonique de Bretagne, Naiade Productions, Sillage Musiques, association Tro Karaez, association Galipette, association Échanges et Cie, RAM du Poher, lycée Paul Sérusier, lycée Diwan, collège Beg Avel, collège St Trémeur, école primaires et maternelles de la commune de Carhaix, association Contrechamp, Office public de la langue bretonne.

L'équipe de l'Espace Glenmor remercie l'ensemble des bénévoles qui s'impliquent à ses côtés tout au long de l'année.

L'Espace Glenmor adhère au réseau Culture Zàtous Bretagne (www.culture-zatous.com)



INFORMATIONS PRATIQUES

Espace Glenmor - rue Jean Monnet - Kerampuilh - 29270 Carhaix

Tél : 02 98 99 37 50 - fax : 02 98 99 37 52 - courriel : contact@glenmor.fr

Site internet : www.glenmor.fr - facebook : www.facebook.com/espace.glenmor

Licences n°1049119 - 1049120 et 1049121

HEURES D'OUVERTURE :

L'accueil de l'Espace Glenmor est ouvert du lundi au vendredi de 9h à 12h et de 14h à 18h.

Photo de couverture : Morgane Duguay - morganeduguay@yahoo.fr

Conception graphique : MetaGrafic - Carhaix

BILHEDOÙ

BERRADURIOÙ IMPLIJET :

- PL :** Priz leun
- PD :** Priz digresket
- PB :** Priz bugale (eus 7 da 12 vloaz)
- PK :** Priz koumananterien
- PS :** Priz skolidi

E-barzh ar prizioù meneget n'emañ ket ar mizoù feurmiñ lakaet da dalvezout pa vez prenet plasoù er rouedadoù gwerzhañ diavaez (France Billet, Ticketmaster, Digtik)

PRIZIOÙ DIGRESKET

Un distaol priz a vez graet d'ar re a ziskouezo ur brouenn ez int: klaskerien labour, tud a zegemer KKO* pe SON** (oadourien nammet), studierien, tud yaouank dindan 18 vloaz, izili SDAY, skolidi ha kelennerien skol sonerezh ar Poc'hêr ha skolioù sonerezh Bro Kornôg Kreiz-Breizh, astalerien, strolladoù ouzhpenn 10 den, izili ar poellgorioù embregerezh kevelerien, an dud zo ganto AOTRE Dudi Poc'hêr kumuniezh, izili « ar Stal Vras » / « Ar Plañchod » evit an abadennoù kensevenet ganto.

LEC'HIOÙ GWERZHAÑ

LEURENN GLENMOR
Eus al Lun d'ar Gwener eus 9e da 12e hag eus 14e da 18e.
1 eur a-raok an abadennoù (gant ma chomo plasoù) en deizioù ma vez abadennoù.

DRE LIZHER

Merkit anv an abadenn, an niver a blasoù hag ar rummoù prizioù. Kasit ho paeamant d'al Leurenn Glenmor (chekenn war anv al Leurenn Glenmor), gant ur golo-lizher skrivet ho chomlec'h warnañ ha gant ur brouenn, diouzh an ezhomm.

LEC'HIOÙ GWERZHAÑ ALL

- KARAEZ
Rann sevenadurel Leclerc
- ROSTRENENN
Ti ar c'hazetennoù.
- GOURIN
Stal Leclerc (rouedad Ticketmaster)
- E FRAÑS A-BEZH
Rouedadoù francebillet ha Ticketmaster (mizoù feurmiñ): staliou Fnac, Carrefour, Géant, Auchan, Leclerc, Cora.

NEVEZENTI !

DIGORET EZ EUS UR VILHEDEREZH ENLINENN !
Gallout a rit prenañ ho plasoù abadennoù war ar Genrouedad hiziviken ha moullañ anezho war-eeun er gêr. Emgav en hol lec'hienn ! (www.glenmor.fr)

MAT DA C'HOUZOUT

Digoret e vez dorioù ar sal 20 munut a-raok an abadenn.
Dibab a c'haller e blas (nemet ar goumananterien)

An holl dud (bugale pe oadourien) a zeu da welet un abadenn a rank diskouez ur bilhed pa'z eont e-barzh ar sal.

HOR C'HEVELERIEI SEVENADUREL

E-leizh a abadennoù pe oberoù sevenadurel a vez kinniget e kenlabour gant obererien sevenadurel all eus ar vro. Trugarekaat a reomp anezho evit ar perzh kemeret ganto hag evit o c'henlabour a-feson.

SDAY : sevenadur dudi abadennoù yaouankiz er Poc'hêr.
Skol sonerezh etrekumunel ar Poc'hêr.
Ar Plañchod : leurenn Kreiz-Breizh.
An Erer Kozh.



KEVELERIEI ALL EUS AR C'HOULZAD SEVENADUREL EO IVEZ :

Kêr Garaez, Yaouankizoù Sonerezh Frañs, ar C'hevread Breizh war al Leurenn(où), Anim15 Prod, Lions Club, Laz-seniñ sinfoniek Breizh, Najaide Productions, Sillage Musiques, ar gevredigezh Tro Karaez, ar gevredigezh Galipette, ar gevredigezh Echanges et Cie, ESM ar Poc'hêr, al lise Paul Sérusier, al lise Diwan, ar skolaj Beg Avel, ar skolaj S.-Treveur, skolioù kentañ derez ha skolioù-mamm kumun Karaez, ar gevredigezh Contrechamp, Ofis publik ar brezhoneg.

Trugarekaat a ra al Leurenn Glenmor an holl dud a-youl vat a genlabour ganti a-hed ar bloaz.

Ezel eo al Leurenn Glenmor eus ar rouedad ha Culture Zâtous Bretagne www.culture-zatous.com



TITOUROÙ PLEUSTREK

Leurenn Glenmor straed Jean Monnet - Kerampuilh - 29270 Karaez
Pgz : 02 98 99 37 50 - plr : 02 98 99 37 52 - postal : contact@glenmor.fr
Lec'hienn genrouedad : www.glenmor.fr - facebook : www.facebook.com/espace.glenmor
Aotroù niv. 1049119 - 1049120 et 1049121

EURIOU DIGERIÑ :

Eus al Lun d'ar Gwener, eus 9e da 12e hag eus 14e da 18e, e vez digor degemerva al leurenn Glenmor.

Luc'hkeudenn ar golo : Morgane Duguay - morganeduguay@yahoo.fr
Empennañ grafek : MetaGrafic - Carhaix

ESPACE
LEURENN

GLEN MOR

WWW.GLENMOR.FR

CONTACT@GLENMOR.FR

02 98 99 37 50



Crédit Mutuel **Arkéa**

